

KANTIK

ITRON VARIA AR SCLERDET

1.

Salud deoc'h, Mari, Rouanez
Euz an Env hag an douar !
Salud d'eoc'h ! Mam a drugarez,
A greis kalon ni lavar.

Diskan.

Itron Varia ar Sclerdet,
Clevit mouez ho pugale :
Hed hor buez, Mam binniget,
Hon diouallit noz ha de.

2.


Choazet a bep eternite
Da veza mam da Jesus ;
Roet oc'h da vain deomp ive,
C'hui hon rento oll eürus.

3.

Lec'hiou santel a zo merket
Da henori ar Verc'hez ;
Eno e skuil varnomp bepret
Tenzoriou he madelez.

4.

Iliz ar Sclerdet so brudet
Dre ar burzudou dispar
A ra ar Verc'hez binniget
E kenver an hep he c'hâr.



5.

Evit dont beteg ar Sclerdet,
Pelerinet gant guir feiz,
Da bedi hor Mam binniget
A dreuz pevar c'horn a Vreiz.

6.

A leiz an henchou ho gueler
O c'herruout a bell bras,
En eur bedi daoust d'ho skuisder,
Daoubleget var ho fenn bas.

7.

Darn a deu d'he zrugarekat
Euz ar grasou ho deus bet ;
Darn all euz an droug daoulagad
A c'houlén beza pareet.

8.

Evidomp-ni oll Bretonnet
A lavar a vouez huel :
Kent evit mankout d'ho karet
Ni ve guel ganeomp mervel.

9.

Dirag hoc'h imaj binniget
Er Sclerdet ni a bedo ;
Pa vimp tentet pe glac'haret
Gant fians ni a gano :

10.

D'an oll e Beuzec, Mam Doue,
Ho c'hoant hirio goulennet :
Ma savetaimp hon ene
O kenderc'hel d'ho karet.

Permis d'imprimer :

5 Août 1902.

F. CORRIGOU, vic. gén.

Kemper, impr. an Eskopti.